

6.

Siouaz ! 'vel guechall Ebroïn,  
Tud fall en hon toüez  
A ra d'al lezen divin  
Eur brezell didruez ;  
Ho sikour a c'houlennomp  
Evit difen hor feiz,  
Ma vezit ato ganeomp,  
Den n'he zenno deuz Breiz.

7.

En enezen Noirmoutié  
O peuz pell-braz bevet,  
Eno servicha Doüe  
'Zo bet ho c'hoant bepret,  
Ar brud euz ho vertuziou  
A dreuz ar Frans a bez,  
Dónezoun ar miraklou  
A verk ho santelez.

8.

Unan a ioa hir amzer  
O c'houzaon kalz a boan  
Gant eur güentl ken dizesper,  
M'oa var he dremen van ;  
Sin ar groaz a rit varnhan,  
Pebez burzud ! Kerkent  
An drouk a dec'h diouthan,  
Yac'h oa 'vel diagent.

9.

Martolodet euz hor bro,  
E spount hag en anken,  
'Ioa e danjer a varo,  
Tostik doc'h enezen,

Ganeoc'h int bet diouallet,  
P'edont holl heb skoazel,  
Diouallit c'hoaz, ni ho ped,  
Martolod Breiz-Izel.

10.

C'hui a zo skeduz er c'hloar  
Gant ar Zent en Envou.  
Mez ganeomp var an doüar  
E chom ho relegou,  
Eul lodennik anezho  
'Zo bet roet d'hor parrez,  
Eun tenzor braz e vezo  
Da gaërat hor büez.

11.

Ia, ma zoc'h bete-vrema  
Ken douz en hor c'henver,  
Eo red deoc'h neuze beza  
Eun tad muioc'h tener,  
Netra ne c'hellit refus  
Hirio d'ho pugale,  
C'hui 'pezo digant Jezuz  
Peb mad 'vit hon ene.

12.


Sant Philibert benniget,  
Dreist-holl ni a c'houlen  
Beva bepret unanet  
Gant al lezen gristen,  
N'or beuz nemet eur galon  
Ama d'oc'h henori,  
N'or bo nemet eur galon  
Er bed-all d'ho meuli !!!

Imprimatur :

F. CORRIGOU, Vic. gén.

19 Juillet 1901.

## SANT PHILIBERT



E PARREZ MOELAN

Sant Philibert a ioa ganet er bloaz 616 e kœr Eauze (Gers),  
hag a oue savet e Aire (Landes). He dad oa gouarner eno,  
arauk beza choazet da Eskop, evel eun eil sant Ambroaz.

D'an oad a 18 vloaz, e oue kasset da Baris, da balez ar  
Roue Dagobert, evit peur-echui he zeskadurez. Mez daou  
vloaz varlerc'h, e tilezaz ar bed, hag en em dennaz e kouent  
Rebais (Seine-et-Marne).

Goude beza sonjet pell amzer e meur a reolen a stad a  
relijuz, ha kemeret an hini a gave ar güella, e savaz ar  
gouent brudet a Jumiej (Seine-Inférieure), hag ar gouent  
a Bavilly. Sikour a reaz ive sevel kouentchou Quinçay  
(Vienne), ha Montivilliers (Seine-Inférieure).

N'en doa ket aoun o rebech he vuez fall ha dinatur da Ebroïn. Hemma, 'vit en em venji, hen tamallaz e gaou, hag a reaz teuler er prizoun e Rouen an abad kalounek.

Tennet er meaz dre c'halloud sant Ouen, Philibert a zavaz ar gouent a Noirmoutié (Vendée). Eno e varvaz d'an ugent a viz Eost 684.

152 bloaz goude, Relijiuzet sant Philibert, evit miret na vije al laêroun-vor, an Normanted, direspert e kenver he gorf, hen dougaz da Zant-Philibert-Grandlieu (Loire-Inférieure), goude da Gunaud ha da Vessay (Vienne), da Zant-Pourçain (Allier), erfin betek Tournus (Saône-et-Loire), ar pevarzek a viz Maë 875.

E' mare ar brezelliou divar-benn ar feiz, relegou an Abad santel oue diouallet, drè virakl, diouz kounnar enebourien fallakr. Eur vaouez a goer Tournuz, greg eur c'halvez hanvet Lorans, ho c'huzaz epad ar Revolution vraz, ha ganthi oant saveteet.

D'an naontek a viz Maë 1901, ar Relegou presiuz, dal-c'het en eur voest kaër meurbét, oue lakeet var auter ar chapel 'zo e kreiz iliz koz kouent Sant-Philibert.

Eul lodennik anezho a zo bet roet da barrez Moëlan, hag eul lodennik all da barrez Trégunc (Finistère).



## · Kantik Sant Philibert ·

TON : *Santez Mari, mamm Doue.*

Diskan :

Sant Philibert, hor patron,  
Selaout hor peden,  
Gant fizianz, a greiz kalon,  
Ni 'ra deoc'h hor goulen,  
Varnomp, var tud hor parrez  
Skuillit puill ho pennoz,  
'Ma vo santel hor büez,  
'Vit mont d'ar Baradoz.

1.

Yaouankik e z'oc'h kasset  
Da balez ar Roüe,  
Hag o peuz eno miret  
Holl gened oc'h ene ;  
Grit eur zell a vadelez  
Ouz hor bugâligou,  
Ha lilien an elez  
'Vo en ho c'halonou.

2.

N'o poa nemet ugent vloaz  
O tilezel ar bed,  
Varlerc'h Jezuz hag he groaz  
Mall oc'h euz da gerzet ;  
Elec'h madou danjuruz  
E plij deoc'h ar beden,  
Ha d'ar gouent e z'it eüruz  
Gant ho mignoun sant Ouen.

3.

'Vit gondori oc'h ene,  
Jumiej o peuz savet,  
Jumiej eo, drè c'hras Doüe,  
Ho neiz muia-karet,  
Hag eleiz a ziskibien,  
Er joa, el levenez,  
Ganeoc'h ouz ar bec'herien  
A zesko kaout trüez.

4.

C'hui zo bet ouspen eur vech  
Gant kalz drouk-prezeget,  
Ha, daoust ma z'oac'h direbech,  
En eur prizoun taulet,  
Heb en em glemm, e pedit  
'Vit an drouk-prezeget,  
Ha laouen e pardounit,  
'Vel ma reaz hor Zalver.

5.

Mez ma z'eo braz ho touzder,  
Eo braz ho nerz-kaloun,  
Rak d'eun tyrand, he zever  
A ziskouezit heb aoun :  
« Ebroïn, oc'h euz lavaret,  
Roit d'an Iliz ar peoc'h,  
Pe justiz Doue kounnaret  
A goüezô stard varnoc'h. »